

Biskoas, eme Sant-Bernard, biskoas ne oue clevet :
Eur goulen gret da Vari a ve bet refuset :
Ar verc'hez a zo hirio ker-galloudec ha dec'h,
Hag en despet d'an amzer ne ket berreet he brec'h.

Ar Verc'hez dinam a Lourd e menez Pyrene,
A ziskouez he zrugarez dre viraclou bemde ;
Ar miraclou a velom e Lourd er Pyrene
Petra viro n'ho guelimp e Lann-Riot ive ?

Evel ar bardonerien a ia leun a fisians
Da glask buez hac iec'hed dar c'horn-se euz ar Frans,
Ni a zeui d'hor chapelic gant eur fisians neve,
Da laret hon oll bouaniou a gorf hag a ene.

A vechou eur medesin kaer vo fysiout en han,
Ne allo gant he skiant hor zicour pa vimp clan ;
Eun hor poaniou. christenien, ni n'euz hen amprouet
Itron-Varia Lann-Riot, hor soulajo bepred.

Pet soudart da Lann-Riot, kent PARTIAL GOUESTLET
Zo bet, bennoz da Vari, er brezel diouallet !
E creiz danjeriou ar bed, pet e deuz conservet !
Bursudou a vadelez heb niver e deuz gret.

Pebez avantach eta evidomp, Molanis,
Hon deuz oll en em glevet da zevel eun ilis
En honor da vam Jesus rouanez an elet
Prest kaer ato d'hor sicour kerkent ma vo pedet.

Itron-Varia Lann-Riot, refuj ar bec'herien,
Taulit eur zel a druez var ar bardonerien,
A re a zo deut hirio, ar re a zeui goude,
Ma'zaint d'an env d'ho meuli hed an eternite.



CANTIC

ITRON-VARIA LANN-RIOT

Ton : *Ni hod salud stereden vor*

DISKAN :

Henor da Verc'hez Lann-Riot,
A zo sicour ar martolot,
Esperans ar mamou christen ;
Ha souten al labourerien.

E Moëlan, e ribl ar mor,
Eur chapelic a zo digor,
Hag enn hi Guerc'hez Lann-Riot,
Mari guir vam ar martolot.

O Mari, pa c'houezo an ael,
Hema zonjo en ho chapel !
Euz ho chapel, mirit bepred,
He lestric paour na ve flastret !

E Lann-Riot tal ar mesiou,
E creiz ar guez hag ho bleuniou,
Eur chapelic a bign en er,
Evit nerza al labourer.

Ma skuiz hema gant he labour,
O Mari, roit prim ho sikour,
Ha pa bedo en ho chapel,
Ra zanto ractal ho skoazel !

An ebestel, var ar mor glaz,
Guechall ivez a besketas ;
Mez pesk ne deu en ho rouejou,
Ken a goms Jesus en autrou.

O Mari, c'houi bedo Jesus,
Ma vo ouzomp trugarezus ;
Ha ma lâro vid-omp ar ger
A ro'chans vad d'ar pesketer !

An oll her goar, ar c'hreunen ed
En douar guechou a ve collet ;
Mez ma zeu Doue da barlant
E lec'h unan ve cavet cant.

C'houi c'houlenno, Guerc'hes Vari,
Ma brofito hor parkou ni,
M'hor bezo cant e lec'h unan,
Da nebeuta, digoll hor poan !

Ho mab Jesus'en deuz prijet,
Gant ho lez pur, beza maget ;
Peb mam ivez en ho chapel,
A gavo lez vit'he bugel.

Pénoz sonjal en ho Mabic
Ha dilezel ar bugelic
A varvo sur, var he barlen
Ma na roit d'he vam he goulen.

Labourer douar, har martolot
A zeui a bell da Lann-Riot,
A ziredo evit pedi
A ziredo evit meuli.

Mez evidomp ni Molanis,
Mar hon eus savet hoc'h ilis,
Bezit mui c'hoas ar Verc'hez ker
Hon diuallo a bep danjer.



CANTIC ALL

Ton : *Kelven*

DISKAN :

Santez Mari Mam Doue, patronez Lann-Riot,
Clevit mouez al labourer, peden ar martolot ;
Pa skuissimp en hon labour, pa grenimp var ar mour
Sellit ouzomp a druez, roit d'eomp bepred sicour.

Hon tadou koz tud a feiz, tud a religion,
Var bord ar mor e Molan 'vit ho devotion,
Ho devoa eur chapelic leshanvet Lann-Riot ;
Lec'h ma pede calounec couer har martolot.

Eun amzer drist a zeuas, an dud vad oué chasséet :
Dre urs tud fall ha difeiz, ar chapel oue pilet ;
Mes d'hor Mam ato fidel, ni zeue dar plas santel
Dirag imach Lann-Riot da c'houlen he skoazel.

Kanomp brema, christenien, kanomp gant joausdet,
Kanomp gloar ha meuleudi d'ar Verc'hez venniget ;
Chetu savet a neve chapelic Lann-Riot ;
Pebez consolatién evit ar martolot !

Ma'n em gavit var ar mor e danjer ho puez,
Galvit Mari gant fisians ; hi eo ho rouanez.
Lavarit a greiz kalon ! O GUERC'HEZ LANN-RIOT !
Ractal Mari zicouro ar paourkéz martolot.

Mad evit an dud a vor, Mari za mad d'an oll,
N'e deus nemet eun desir, ne zaïo den da goll ;
Pa vec'h eta trubuillet, gan ar c'hlenvet goasket,
Pedit devot ar Verc'hez, sur e vec'h confortet.

An hini e deus maget hor Zalver gant he lez,
Evidoc'h, mamou christen, zo leun a vadelez,
Mar vank d'eoc'h magadurez 'vit souten ho pugel,
Deut gant ar brassa fisians da bedi d'he chapel.